

PATRONEZ DOUS AR FOLGOAD

Guillou

Ton Kelven



Pa - tro - nez dous ar Fol - goad, Or Mamm _ hag on I - tron _
 1. Euz an Ar - vor, ar gour - re Ni deu _ d'ho sa - lu - di; _
 6. Ma - ri, Mamm ar gris - te - nien, Ma ka - rit an I - liz, _
 14. Ma kle - vit mad or pe - denn, Mi - rit _ na daim da goll _



An dour en on daou - la - gad, Ni ho _ ped a ga - lon: _
 1. Oll ez om ho pu - ga - le, Oll ho _ ka - rom, Ma - ri. _
 6. Heb da - le deut d'he di - venn Diouz e - ne - bou - rien kriz. _
 14. Ma c'hel - lim kan - (n)a la - ouen E - vel _ Sa - laün ar Foll: _



Har - pit an I - liz San - tel, A - vel di - roll _ a ra... _
 1. Tud ar gour - re, _ Ar - vo - riz, Di - re - det om _ hi - rio _
 6. Hir - ra ma c'hel - ler gwe - led Er mor 'z euz tar - ziu gwenn, _
 14. "O Ma - ri! O _ Ma - ri _ a! "C'hwi 've - zo on _ I - tron; _



Tenn hag hir eo ar bre - zell! Ar peoc'h o Ma - ri - a! _
 1. Da be - di 'vid an I - liz, Da be - di 'vid _ or bro. _
 6. Ba - gig Sant Pèr 'zo strin - ket Euz eur gar - reg _ d'e - ben. _
 14. Be - teg an eur di - we - za, Ren - (n)it en or _ c'ha - lon. _

Diskan : Patronez dous ar Folgoad,
 Or Mamm hag on Itron
 An dour en on daoulagad,
 Ni ho ped a galon :
 Harpit an Iliz Santel,
 Avel diroll a ra...
 Tenn hag hir eo ar brezel !
 Ar peoc'h o Maria !

1. Euz an Arvor, ar gourre
 Ni deu d'ho saludi;
 Oll ez om ho pugale,
 Oll ho karom, Mari.
 Tud ar gourre, Arvoriz,
 Diredet om hirio
 Da bedi 'vid an Iliz,
 Da bedi 'vid or bro.

6. Mari, Mamm ar gristenien,
 Ma karit an Iliz,
 Heb dale deut d'he divenn
 Diouz enebourien kriz.
 Hirra ma c'heller gweled
 Er mor 'z euz tarziou gwenn,
 Bagig Sant Pèr 'zo strinket
 Euz eur garreg d'eben.

14. Ma klevit mad or pedenn,
 Mirit na daim da goll
 Ma c'hellim kana laouen
 Evel Salaün ar Foll :
 "O Mari! O Maria !"
 C'hwi 'vezo on Itron ;
 Beteg an eur diweza,
 Renit en or c'halon.

DOUCE PATRONNE DU FOLGOAD

R: Douce Patronne du Folgoët,
 Notre Mère et Notre Dame,
 Les yeux en pleurs,
 Nous Vous prions de tout cœur :
 Secourez la Sainte Eglise,
 Il souffle un vent de tempête...
 Dure et longue est la guerre !
 La paix, ô Marie !

1. De l'Arvor et des terres,
 Nous venons vous saluer ;
 Nous sommes tous vos enfants et tous,
 Nous Vous aimons, Marie.
 Venus des terres et des bords de mer,
 Accourus aujourd'hui
 Pour prier aux intentions de l'Eglise,
 A celles de notre pays.

6. Marie, Mère des chrétiens,
 Puisque Vous aimez l'Eglise,
 Sans tarder, venez la défendre
 Contre des ennemis sans pitié.
 Aussi loin que porte le regard,
 La mer est couverte d'écume blanche,
 La petite barque de Saint Pierre
 Est jetée d'un rocher à l'autre.

14. Si Vous entendez bien notre prière,
 Evitez que nous n'allions à notre perte
 Et faites que nous puissions
 Chanter de tout cœur,
 Comme Salaün Le Foll,
 "Ô Marie ! Ô Marie !"
 Vous serez Notre Dame ;
 Jusqu'à la dernière heure,
 Régniez sur notre cœur.